

YF_0069_Ur son garantez

E-barzh ar radio, an tele, soniou a-walc'h 'vez klevet
Diskiant ha troet fall da ganan karantez.

Kanerezed, kanerien, 'klask ran an "top sinkant"
Gant pemp ger vez graet ur son, n'eus forzh, ma vo arc'hant

War ar galleg n'int ket mailh, ha berr-tre o spered
Pe neuze e kemeront ac'hanomp evit gwir genaouien.

Va mestrez 'vel kalz re all 'selaou soniou iskis
[O] Redek war hon gwagennoù gant ar brasan dispriz.

Setu am-eus laket em sonj, sevel dezhi ur son
War un ton kan-ha-diskan, gant gerioù a feson.

Evit kanan ar garantez n'eo ket ret komz galleg
'Ba sellou flour va mestrez gavin rimou brezhoneg

'Ba sellou flour va mestrez gavin rimou brezhoneg
Da gas va son beteg penn, hep galleg na saozneg.

C'hwi ivez va mignoned, c'hwi po tu d'am selaou
Pedin 'ran holl d'am c'hredin, rak n'eus ket ur ger gaou.

Ar plac'hig koant a garan, zo seder dibikouez
Jodou vourous, blev melen, he daoulagad mour-rouz

Ur fri tougn, ur goulig moan, ha muzellou ruz-tan
Pa vouse'hoarzh, da bokat dei diouzhtu a sav din c'hoant.

En he bruched div vronnig, dibleg ha sonn o 'fenn
Un 'pep dorn din d'o flouran, pegen kaer abadenn.

D'he houriz a ran an dro gant va daou zorn serret
D'he c'hroazellou laran ket, ken splann ma'z int krennet.

Dhe c'hroazellou laran ket, splann ma'z int krennet
Na vel d'he feskennou ront a finv dre ma vale

Div feskennig staget mat, finval dre ma vale
He divesker paz 'int noazh, ziluchfe ar pokez.

Ouesk evel ur bod haleg, skanv evel ur bluenn
War o lerc'h dreuzfen ar bed, fleurenn gaer va buhez.

Pa vez ganin er festou-noz, he dornig em hini
Skanv he zroad ha sonn he 'fenn, o tansal ar pach-chpi.

Vez forzhig daoulagad lemm, c'hoant 'walc'h da gaout tanva
Siwazh deoc'h paotred faro vo ket deoc'h d'he ambrougan

Tro ma goug pleg he divrec'h pa zistroimp d'ar ger
Ur drugar da vez' tommet gant kroc'hen ken tener.

Ha pa ven en he gwele, skoachet 'tal va mestrez
Me garche padfe an noz d'an tu all da greisteiz.

Pa vez paket eur banne re gant va c'hamaraded
Na sav ket war he marc'h krug, didrouz vez an digouezh.

Lod a lavar on dallet gant re a garantez

Ne ran van diouzh o c'homzou, ni zo eurus asamblez.

Diouzh o c'homzou ran ket van, ni zo eurus asamblez
Ha pa vefe kaeroc'h lec'h all mo ket a zienez.

Na fougeal na brabansan, nemet a wirionez
Erru on e penn va son, ur son a garantez.

Savet d'ar plac'h a garan, aman e Bro Geme
Ganti 'm eus c'hoant da vevan, ni savo [vevo] tiegezh.

Korn an tan e pad ar goanv, an hanv kontan stered
Ni vevo [Nimp] aman didrouz, tomm diouzh ar brezhoneg [hon bugale]

An daou DINASKET
(Kan an drask e Landelo)